

## KANTIK da S. E N E O U R

Diskan - Sant Eneour, hor sant patron,  
 Dalc'hit ar feiz start 'n hor c'halon;  
 Selaouit ouz hor pedennou  
 Ha skuilhit warnomp ho krasou.

- I. E Breiz-Veur en tu all d'ar mour  
 Ez eo ganet sant Eneour,  
 Kelennet gant e vamm Elen  
 E skoueriou mat eun ti kristen.
- II. Evelse 'tle pep manm vreizat  
 Rei d'he bugale ar skouer vat,  
 A-vihanik deski d'ezo  
 Karet 'n Aotrou Doue ato.
- III. Sevel 'reas 'n e yaouankiz  
 Eur skol vrudet d'e genvroiz,  
 Evit rei d'an holl vugale  
 Deskadurez lezenn Doue.
- IV. Henchet goude gant dorn Doue,  
 E teuas da jom e Kerne;  
 Eur barrez vras en deus savet:  
 PLONEOUR eo bremen hanvet.
- V. Goude ive meur a vloavez  
 Tremenet e Plouneour-Trez,  
 Da Blouneour-Menez 'z eas,  
 Hag el lec'h-se hor sant 'varvas.
- VI. Sant Eneour karantezus,  
 Ah! taolit eur sell truezus  
 War ho pugale dastumet  
 Evit ho meuli, tad karet.
- VII. Ni zo dinierz, Satan zo kre,  
 Brezel a ra ouzomp beraide;  
 O tad santel, ouz an tech fall  
 Ni ho ped ato d'hon diwall.
- VIII. Grit, ni ho ped, ma tiwano  
 En hor parrez ha tro-war-dro  
 An ed melen en douarou,  
 Ar santelez er c'halonou.

